

EUR CHANSON NEVEZ

Savet var sujet Merch'et Elliant

1

Mar mije bet ar studi
Evit galout composi
Me a mije bet scrivet
Herves ma faltazi

2

Me a mije bet scrivet
A compozet eur zonn
Var sujet merch'et Elliant
A zo tammic direzonn

3

Me o ped eta ann oll
Da glask dinn comsou sleir
Evit ma hellinn composi
Ar zonn ma brao a caër

4

Deuit onn da sonjal
Merch'et yaouank Elliant
Pa o quelant dre a ruiou
Gant o minn quer friand

5

Merch'et yaouank ar vouch'ma
A fel deo bea guisquet mad
Digant cotillon a bragou
A fel dezo da lakat

6

Kercouls paour a pinvidic
Holl menn'ar memes-tra
Guisquet a rann dilajou
Ia deuz ar re guera

7

Dilad brao a ve gate
A guenn caër da velett
Alies ne venn' quet paet
A memes tra venn guisquet

8

Be ve gate var o fenn
Eur begadic coton guenn
A var rese a ve laqueet
Eur rubanni pe eur zeidenn

9

Pe gate ch'oas eur c'hoef
A tout' vechou denteless
Neuze e zonzjou dezo
Trehout ré war ar mez

10

Lakat rann' ch'oas eur ch'oalier
Danteles tro var dro
Ma o goug' hanter o cheigne
Calzic m'ann dizolo

11

Ac ouspennze a wellon
O tougueunn ann echarpe
Evit besa degaget
A plijout dar botret

12

Be ve gate euz o c'hotas
Eur chaden euz o monn
A deuz eur penn diouti
Ve lakeet eur penn ongnon

13

A pa sortienn deuz ann ti
Evit donn var a ruiou
Neuze quemerinn ar mod
Da lacat eur bragou

14

Eur bragou dantelezet
Eus ann traonn ve frizet
Aroc a ve bet guisquet
Red ve beza feret

15

Douguenn reon juptezen venn
Euuz ann traon dantelez
Savet ve en hini all dann ercl
Evit ma ve guelett.

16

Bragall rann o heun en henn
Parasol diganto
Ne brijfenn quet coseal
Nenet ar re a blij dezo

17

Manigou var o daouarn
Evel tud jentil a pinvidic
Enn o zreid boutou talonic
An drase zo magnific

18

Demt eo gate breman ar guiz
Evit monet da bourmenn
Fermi a rann ar veloioù
Zo sur evit o douguenn

19

Ne quet deut mad deuz o clhavel
A bregou deuz dimezi
Surtout e parres Elliant
A zo meur da hini

20

Ne housson quet gonnit o boued
Na oza da zibri
Ch'oas ve larer diouti
E venn merch'et digourdi

21

Renes zo merch'et degourdi
Evit ebatou var botret
Mes red eo potret vrao
Hag ouspen-ze degaget

22

Evit beza potret digourdi
Ouspen-ze degaget
Ma ne deuz quet cals arch'ant
Ne vezo quet istimet

23

Me o ped merch'et yaouank
Ma blichi quet deoch va son
Claskit ar genmarterienn
A va ch'ass d'ar prison

24

Mar fell deorch gout merchet
Piou neus savet ar son [yaouank
Eun deun a zo dija dall
Malherus evitant

25

Evit echui ma chanson
Ag ! evit echuit tout
Ne gredon quet d'am santimant
Meuz pregnet cals a zrouq

26

Mac e zon commancet
Da ober ar vicher
Abalamour d'amm bugale
Evit tenno deuz ar vijer.